

13.

D'ar zul, ni 'lel d'an offisou  
Evit renta gloar da Zoue ;  
Ni 'zilezo hon labouriou  
Evit mad hor c'horf hag hon ene.

14.

Ebars en hon tiegesiou  
E vo respetet hano Doue ;  
Ni 'zesko d'hor bugaligou  
Hen lavaret ato gant karante.

15.

Ni 'vo bepred guir gristenien,  
En despet d'ar brezel kounnaret  
A ra bréman d'hor beleien  
Satan hag he *vrasa mignoned.*

16.

Oh ! grit deomp, Itron Varia,  
Kaout kalon e kreiz ar brezel...  
Ha mont oll d'an Env da gana  
Ho madelez evit Breiz-Izel.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 4 Septembre 1905.

E. FLEITER.

Kemper, impr. an Eskobti.



# ITRON-VARIA AR SALET

Ton : *O Vierge, fontaine et rocher.*

1.


Iron Varia ar Salet,  
Selaout mouez hor pedennou ;  
D'ho chapel ni 'zo diredet  
Gant keuz ha glac'har d'hor pec'hejou.

DISKAN

Truez, truez, Guerc'hez ar Salet,  
Truez, truez ouz hor bro garet !

2.

Var bord ar feunteun burzudus,  
Ho peuz laret d'ar vugaligou  
'Oa kounnaret ho Mab Jesus  
Abalamour da galz dizursiou.



3.

Devez ar zul, devez Doue,  
A zo disprijet dre al labour ;  
Goude dont da goll he ene,  
An den kez a laz he gorf paour !

4.

— Guelit, al labousedigou,  
P'ho deuz klasket ho magadurez,  
D'ho c'hrouer a gan ho c'hantikou,  
Ha biskoaz ne gavont dienez. —

5.

Teod an den zo gréat gant Doue  
Evit kana he veuleudiou ;  
Mez siouaz ne glever bemde  
Nemed komzou groz ha blasfemou !...

6.

Mari, ni c'hell breman kompren  
Perak e feunteunik ar Salet  
Ne zizec'h mui an eienen...  
Ho taelou ne baouezont da redet !

7.

Bouzar ouz ho mouez klém mus,  
Ho pro garet, bro ho pugale,  
He deuz troet kein da Jesus  
Evit ober brezel da Zoue.

8.

Ne fell mui d'hon enebourien  
E ve kaset ar vugaligou  
Da zeski, d'ar skoliou kristen,  
Hent ar vertuz hag hent an Envou...

9.

O velet ar bed dirollet,  
N'omp ket evit miret da grena...  
Daoust hag ho torn a ve skuizet,  
Ha breac'h ho Mab prest da goueza ?

10.

Allas ! ma n'ho pije touchet,  
Gant ho taelou, Kalon hor Zalver,  
Oll e vijemp bet kastizet  
Gant ar pounera goaligner !

11.

En aner ar paour kez kouer  
A gemerfe skuisder oc'h hada !  
D'ez-han biken he barkeier  
Ne rofent hed mad d'ober bara...

12.

Bennoz d'oc'h, Itron ar Salet,  
Da veza, gant ho torn galloudus,  
Harpet breac'h eun Doue kounaret...  
Ni vezo fidel d'ho Mab Jesus.